

CANTIC SPIRITUEL

VAR AR BURETE.

Var un ton nevez.

CIELAOUIT oll, tud yaouanq, ur guelennadurez,
A so meurbet profitapl vit ho silvidiguez,
Da viret ar Burete evel ma zeo dleet,
Da Jesus, guir Vab Doue, Pried ar Guerc'heset.

Cals a glêvo ar Verz-mâ, hac a vezo fachel,
Balamour d'ar virionez so enni disclêryet:
An den clàn e zaoulagad n'ell qet sellet an de,
Nac ar re a so coupabl clêvet ar virione.

Ar sujet eus ar Verz-mâ eo ar fragilite
Demeus ar merc'het yaouanq re scànv a volonte:
Allas! guelet rêr gante alies glac'haret
O zadou hac o mamou, goude o beza maguet,

Ar re a so vertuzus n'en em offançont qet
Vit laret ar virionez d'ar re so imparfet:
Doue a gommand qelen ar re oboissant,
Ha fixa bars en hent mad ar re so variant.

Allas! pelec'h ma'n amzer ma voa'r merc'het contant
Da exposi o c'horfou d'ar maro, d'an tourmant?
Guell vise ganto beza losqet ha merzeriet,
Qent eguet e nep lêçon offansi o guerc'hdet.

Pa annonces Gabriel d'ar Ver'hes glorijs
 E voa choaset gant Doue da veza Mam Jesus,
 E laras d'en em excus penos ne vise qet,
 Mar bise dre an dra-se offancet he guerc'hdet.

N'en deus tra var an douar a ve a vrassoc'h pris,
 Ma carremp consideri, eguet an honestis;
 An oll aour, an oll arc'hant, hac ar mein precius,
 E comparêson dezi a so traou disprisus.

Pa ve collet an arc'hant hac ive al leve,
 Gant poan a so c'hoas moyen d'o gonit adare;
 Mes mar collit hoc'h enor, ha fallout e recour,
 Qement den a so er bed n'allint qet ho sicour.

Enor ar merc'het yaouanq so evel ur veren,
 A so facil da derri, pe evel paper guen,
 Pehini gant ur bluen goude beza scritet,
 Evit poannia e voelc'hi james ne ve grêt net.

Greomp c'hoas ur gomparêson eus ar fourdilisen
 Hac an tenzor precius, enor ar fumelen:
 Ar fourdilis so brillant pa zeuer d'o sellet,
 Mar o zoucher gant ar bis, e collont o guenet.

Allas! siouas, tud yaouanq, pa brometer deze
 Comzou caer, fidelite, ha peb seurt carante,
 A zo facil da gredi, qen na vezint tromplet,
 Ha goude' pad o buez e chomont glac'haret.

Lucifer a bromete da Eva, da Adam,
 Evit debri eus ar frouez n'o devise nep blam;
 Allas! hac e voent tromplet: hac evelse bremâ
 E trmoplet o bugale dre lies promessa.

Allas! gant an den yaouanq so preis an ærouent,
 Goude glac'hari o zad, o mam hac o c'herent,
 Pa na gueront conservi dreist peb tra o enor,
 A so cals preciusoc'h eguet cant mil tensor.

Allas ! an tad hac ar vam a vo ive daonet
 Balamour d'o bugale, pa n'o c'horrijont qet :
 Evel an doucder ar frouez a reputer d'ar guez,
 Eo d'an tad ha d'ar vam buez ar vugale.

Ar blanten, pa ve yaouanq, a bleg gant peb avel,
 Evit e derc'hel eün, e zeo ret he sevel ;
 Evelse ar vugale, ma na vent corriget,
 A blego dindan ar bec'h an natur corrompet.

Rac-se, tadou ha mamou, pa oc'h eus bugale,
 Mar fell deoc'h beza divlam abalamour deze,
 Na lezit-y qet da vont da nep seurt assamble
 Na vo unan ac'hanoc'h, pe o c'herent gante.

N'en deus den var an douar a nep seurt qalite,
 Ma na gar laqat eves, na gollo e ene ;
 Liessoc'h a zrouc-speret a so o tarnijal,
 Eguet so a guellienen var dro un aneval.

N'en deus na foar na marc'hat, pardon na nep andret,
 N'en em gav ha Lucifer hac e gamaradet,
 Eguis bleizi arraget pere a so subtil
 Da drompla an dud yaouanq pere a so fragil.

O lezel an dud yaouanq re en o liberte,
 Eus o mesur discredet gant re a vanite,
 E roer sujet deze d'en em rêi d'ar pec'het,
 Difficil eo n'em viret pa vezer commancet.

Ar Roue an oll furnez en devens lavaret,
 Nep a gar re bugale a vezo glac'haret ;
 Rac deiz ar Varn general hep mar e devo blam ;
 Pa rei bugale daonet mallos d'an tad ha mam.

Me ho conseil, tud yaouanq, da viret chastete ;
 Evit renta Jesus-Christ amoureux hoc'h ene ;
 En em gonsacrit dezàn hac e vezot eurus :
 Biscoas ne voe servicher ha qer carantezus.

Jacob, evit eureugi merc'h an ingrat Laban,
 A chomas ahet seiz bloaz er fatig hac er poan:
 Jesus so deuit er bed-màn d'eureugi ur vestrez,
 En deus, balamour dezi, finisset e vuez.

Satan, clàn hac anvius o velet omp choaset
 Da bossedi ar plac caër en deus dre gloar collet,
 Mar gall hon laqai da goll un tensor precius,
 Evit ma facho ouzomp hon Redemptor Jesus.

Mar fell deoc'h beza divlam, n'en em gavit nepret
 An eil sex gant eguile assambles da brezec,
 Rac an occasionou a so re dangerus;
 Nep en deus o approuvet a so bet maleurus.

Na ouffe den toucha peg na ve' zouarn souillet,
 Na qerzat var glaou tan na vo e dreit poaset;
 Evelse an dud yaouanq an eil gant eguile,
 Pa ve Sent ha Senteset, ec'h offançont Doue.

Den n'en deveus ar furnez en devoa Salomon,
 Nac ive qement a nerz evel en doa Samson.
 Evit o nerz: o furnez, e zint en em gollet;
 Nep na gred ar virione, a velo dre effet.

Elec'h lacat ho corfou e fatic hac e poan,
 Mar chomit hep exerciç, ec'h arruo Satan
 Da invita, da laqat traou sot en ho calon,
 Ar guir voyen da drec'hi eo yun hac orêson.

Mari Egyptianes ha Mari-Madalen,
 A gonduas ur poulsat ur vuez disordren,
 Ha penevert ar gasti a rezont d'o c'horfou,
 E vent bremâ o lesqi e creis an ifernou.

Pa oa'n Autrou Sant Anton ebars en ermitach
 O combati ouz Satan ountàn leun a arrach,
 Pa oa en e orêson, e save avichou
 Evit ober exerciç, réi e gorf d'ar poaniou.

P'en em gav daou zen yaouanq an eil gant eguile,
 Sonjont emedi Doue present en o ene;
 Merqa ra an oll ceuvrou, comzou, songesonou,
 Var ben ma zaïnt dirazàn da renta o c'hontchou.

Sonjomp ouspen er stravill a vezo o clêvet
 Mouez trompillou an Ælez, pa finisso ar bed,
 O soumeti peb-unan d'en em gavet present;
 Den n'allo beza exant evit aour nac arc'hant.

Petra rai ar bec'herrien pa vezo digoret
 Al leor eus o c'houstianq o devezo scrifet;
 Pa vezo grêt hor setanq, divezat vo gouela,
 Divezat vezo neuse fallout he c'horrija.

Mar deu goal sonch er galon, goulennit diouti,
 Goude plijadur ar bed hac hi allo souffri
 An tan grevus en ifern, pa ne allomp amàn
 Anduri var hor c'hroc'hen ur fulennic bian?

Un Ermit, sollicitet d'ur pec'het dishonest
 Gant ur femelen mechant, en em divisqas prest,
 Hac en em stringas en tan, o lavaret dezi:
 Approuvomp e recompanq, qent monet da bec'hi.

Erfin, laqit evez mat ous ho santimanchou,
 Ho pemp sqiant naturel; ar re-se ho tougo,
 Ma na guerit dioüal piz, da souilla hoc'h ene,
 Evel ma eure David guechall gant Bethsabe.

Qeit ha ma zomp er bed-mâ, omp e danger bepret,
 Abalamour d'hon natur so douguet d'ar pec'het;
 Ar gombat a so livret etre Satan ha ni,
 Reteo deomp-ni caout courach, mar fell deomp edrec'hi.

Petra sonch ar bec'herrien, evit daou na trêde
 O deus da chom er bød-màn, coll an eterniqe,
 Hac int oc'h allout beza corf hac ene contant
 Er barados da viqen, hep anui na tourmant.

Clêvet oc'h eus ar voyen, mar qerit he miret,
 Evit en em brepari da gaout da bried
 Jesus, mar en desirit, ma na ellit gortos,
 Er Sacramant an Auter e qafot ho repos.



C A N T I C

Var an importanç eus ar Zilvidiguez.

PETRA servicho da un den
 Poll gloar ha pompou monden,
 Hac e ve mestr var ar bed oll;
 Mar da e ene sioüas, da goll!

Petra servicho dit, den avaricius,
 Da aour, da oll arc'hant, da densor precius?
 Pa vez da-unan mestr er bed universel,
 Mar coez da ene paour er flammou eternal?

Var ar presanç a Zoue.

Mar oc'h eus c'hoant da gometi ur pec'het,
 Clasqit ur plaç a vezo euz ha secret,
 E pehini Doue n'o quello qet,
 Hac eno grit hardis ar pez a gueret.

In manus tuas.

Etre ho taouarn, va Doue,
 E recommandàn va ene:
 Va Doue, c'houi oc'h eus va frenet,
 Na vet qet caus mar benn collet.

A enep ar fals mignonet.

E prosperite pa vezet,
 O pezo nombr a vignonet;
 Mes mar bez ar rod a fortun
 Control deoc'h, n'ho pezo nicun.

Var an doujanç Doue.

Doue en deus treid plom, n'en em hast tam ebet
 Da bunissa crimou ar pec'her obstinet.
 Dioüallomp gouscoude, ouarn eo e zaou dorn,
 Pa en deus hir gortoset, e crog bete'n ascorn.

Var an heur incerten eus ar maro.

Pa ne ouzoc'h get ar plaç, an heur hac ar momet
 Gant ar maro traïtour ma veot attaquet :
 Gortoit-hi e peb plaç, e peb heur ha momet,
 Evelse c'houi a viro ma vezot surprenet.

Var ar memes sujet.

Ma ouffac'h evit certen n'o pe qen an amzer
 Da veva var ar bed-màn nemet ur mis antier,
 C'houi ho pe regret certen da vesa implijet
 Hoc'h amzer da gundui ur vuez debordet.

Ha gouscoude e c'hoarzit, hep sonjal tam ebet,
 Noc'h eus get nac ur moment nac un heur assuret ;
 Marteze abars an nôs allac'h beza jujet
 Hervez ho merit, d'an tan pe d'ar guir joaustet.

Vur ar goal Gôvession.

Credit certen hac assuret,
 Ma n'en deus chenchamant ebet,
 Ne dal tra ho côvession ;
 Rac-se diouallit, va mignon.

Oréson a enep an teir goalen a gasti.

Ni ho suppli, ô va Jesus !
 Dre hoc'h hano carantezus,
 Da gass pell dious hor c'harter
 Qernes, ha bocen, ha brezel.

Oréson da Sant Gueltas.

Autrou S. Gueltas, c'hui eus ur gallout bras meurbet

Digant Doue a enep an oll hac arraget ,
 Preservit e peb amzer ho cuir servicherrien
 Diou hac clàn hac ive diou pep seurt angen ;
 Ni ho ped hac ho suppli eus a greis hor c'halon
 Da chassal ar voalen-se pell diou hor c'hanton.

CANTIC VAR AR *MARIA MATER.*

O Guerc'hes Vari , Mam a c'hraç ,
 Ha Mam a druez e peb plaç ,
 E peb amzer hor preservet
 Pur ha net diou peb pec'het ,
 E peb amzer hor preservet
 Diou griffou an droue-speret.

En heur ar maro pa vezimp ,
 Guerc'hes Santel , roit sicour dimp ;
 Neuse recevit hon ene ,
 Ha presentit-hi da Zoue.

Rentomp gloar da Zalver ar bed ,
 Zo bet gant ar Verc'hes ganet :
 Rentomp gloar d'an Tad Eternel ,
 Hac ive d'ar Speret-Santel.

Ra vezo Doue hep fin meulet
 Gant an oll Zent hac an Ælet :
 Ra vezo meulet hep paoues
 Bremâ hac er fin da james.

AD MAJOREM DEI GLORIAM.

F I N.

E Montroulez , e ty LÉDAN , e traon ru ar Vur.